

(254)

Recit

Demeus an darvoud meurbet horruhl diguezet en Montbouton, tost da Bedford, en nosvez an 10 d'an 11 eus a vis Gouere diveza, 1844.

Var ton: Deomp. ni oll breman.

Deut oll da zelaou, me ho ped,
Eun darvoud horruhl euet
Tost da Bedford, en Montbouton,
A ra spouroni ar galon.

Eur gorventen, arvel euzus
Coezet var templ santel Jesus,
A vranl an ilis en antier,
Hac a lanç an doën en er.

Neuze e zeo en em dolet
Er pevar c'horn eus ar vèred,
Gant eur fulor eus ar vrassa,
Hac eun drous eus ar spoutissa.

An oll beyou zo diffrannet
(255) Ar c'horfou en er zo stringet:
Eun horrol e voa beza test
Demeus eur c'hen euzus arvest

Pa deuas an deiz da dargza,
Vo a eur foul vras eno dija.
Eur c'hri forç a leusget dre oll,
O velet qer terruubl horrol.

Quiet a rêt a bep costez
Lorfou hac a voa en ho fez,
Memprou distag ha relegou,

A sclass e an oll galonou.

Autoriteou eus a quèr
En em garas en bër. amzer
Er vèred, a voa disfontet,
Hac a rente an oll spontet.

Eus a bep tu voe digasset
Gant soign hac ar brassa respect
Relegou paour an dud maro
Da vea entèret eno.

Anfin, gant soign ar gristenien,
(256) Gouscoude e teujot a benn
Da ellout dont da repari
Diguzet horruhl an tempest cri.

Mes, daoust m'eo eno reparet,
Ha qempennet oll ar vèred,
Atao e teuy sonj er memor
Eun arvest qer leun a horror.

Breizig oll, christenien quirion,
Pedomp Doue a greiz calon
Ne vezo biqen hor bro test
Demeus eur c'hen horruhl arvest.

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 254-256.)
strophes non numérotées.